




DISPUT



ETRE AR MARO HAC AN DEN YAOUANQ



Ar Maro

Cetu me eru, va mignon,
Da ober dit renta reson
Demeus da vue tremenet,
Scuis eo Doue ous da velet.

An Den Yaouanq.

Autro Doue, piou eo eman
A zo deut quen dizonj aman ?
Ma speret a zo oll troublat
Gant epouvant eus e glevei.

Ar Maro.

Petra lavares va mignon ?
Lez da spont ha cont da rêson
Ha na vouies-te quet ervad
E teujen abred pe divczad.

An Den Yaouanq.

Allas ! zivoas ne vouien quet
E cleac h donet quen abred ;
Me zonje din, pa voan dispos,
Ne varvjen, quen e vijen cos.

Ar Maro.

Mes alies e poa clêvet
Ne meus biscoas den espergnet,
Hac e clean an oll falc'had,
Coz ha yaouanq eus a beb oad.

An Den Yaouanq.

Allas ! sivoas, en joa ar bed
E voa ma speret occupet :
Em yaouanquis voa ma fianç,
Hac em mignon ma esperanç.

Ar Maro.

Penos den sot hac aheurtet,
Ne voaste quet avertisset
Da reformi da voal vue,
Pa ne voas quet sur a un de ?

An Den Yaouanq.

Allas ! me vel on faziet ;
Mar plij ganec'h c'hoas, deportet,
Roit din c'hoas termen,
Ma renqui mervel en pinijea.

Ar Maro.

Penos e fell dide ober
Pinijen en quen ber amzer.
Pa ne c'heus gret betec vreman,
Ha te pell zo var ar bed-man ?

An Den Yaouanq.

Me bromet dec'h a dra certain,
E rin prontamant pinijen
Da repari ma yaouanquis,
Ma roit din termen eur mis.

Ar Maro.

Avoalac'h eus bet a amser,
Ma carjes ober da zevel ;
Mes alles pelloc'h appet :
Eru an heur red eo mervel.

An Den Yaouanq.

Pa ne n'en quet ho polante
Va lezel queit-se en bue,
Ma plij ganec'h, da vianan,
Eun devez c'hoas a c'houlennan.

Ar Maro.

Harça ! brema paciantet :
Eru an heur, red eo monet ;
Rac-se-ta, sonj es coall vue,
Ret eo monet dirac Doue.

An Den Yaouanq.

Penos eta, mervel so ret
Ha greis va nerz ha va yec'het !
Penos quitted va desseniou,
Va joa, va c'herent, va madou ?

Ar Maro.

Diveat out brema da vouela
Homan eo da heur divea :
E han da rei did an tol marvel,
En heur ma e renques mervel.

An Den Yaouanq.

E C'HOULEN SIKOUR DIGANT E
GUERENT HA MIGNONET.

O va c'herent ha mignonet,
E hano Doue, va zikouret :
Scoet ouñ gantan d'ar maro ;
Deut d'am zicour, hastiuf.

Ar Guerent hac ar Mignonet.

Evit brema ne allomp quet,
Beza hom eus an affer bresset ;
Pa retoñimp, ni a velo,
N'oc'h eus quen a façon maro.

Ar Maro.

Guel, den zot a den aheurtet,
Petra respont da vignonet !

Anzao breman den diviñ,
Peguen tromplu e a yaouanquis !

An Den Yaouanq,

Guir a larit me zo tromolet
Gant yaouanquis ha mignonet ;
Breman me ro dé mil mallos,
D'am oll malheur e zint bet caus.

An Den Yaouanq.

E C'HOULEN SICOURS DIGANT DOUE
HAC AR VERC HEZ.

Me ho suppli, o va Jesus !
Ha c'hu Guerc'hez, Mam druezus,
Me ho ped dre o madelez.
D'an zicour c'hoas, me pec'her kez.

An Autrou Doue

Penos en teus an assuranç,
Da c'houlén ouzomp assistanç !
Bepret out bet hom adversour,
Petra ve demp-ni da zicour.

An Den Yaouanq.

E C'HOULEN SICOUR DIGANT AR SENT.

O Zent, mignonet da Zoue,
Ho ped truez ous va ine !
Gant an oll hon abandonet ;
En hano Doue va zikouret.

Ar Zent.

Penos e c'heus an hardisson
Da c'houlén hon protection !
Ne c'heus quet miret hon gœliou,
Nac imitet hom vertuziou.

An Den Yaouanq.

E C'HOULEN SICOUR DIGANT E
ÆL MAD

O va Æl mad ! ô va den quer !
Var gardien en peb amzer,
M ho ped, va zicourit brema
Em necessite diveza.

An OEL

Quement a ellen a meus gret,
Betec vremen en da andret :
Poent e zeo din d'abandoni,
Pa ne teus quet sentet ouzin.

An Den Yaouanc.

Me vel ervad é tremenet,
Va amzer da veza sicouret ;
Bebet a meus en libertin,
Doue ra justic er fin.

Em maro em diles Doue,
Pa'm boa dilezet em bue ;
Resistet meus d e oll graçou.
Hac em refus em goulennoù

An Den Yaouanq.

O QUITAD HE GUERENT HAG HE
VIGNONET

Dilezet oun en abandon ;
N'en deus mui evidon pardon,
Adieu, querent ha mignonet,
Adieu, bed fall ha miliguet.

An Den Yaouanq.

E QUITAD JOAUSTET AR BED-MAN.

Adieu, grandeur ha bombançou,
Enoriou ven a triomphou ;

Adieu d'an traou eus an douar ;
Adieu d'an ev, adieu d'he c'hloar

Mallos d'ar vam, mallos d'an tad.
A zo bet ouzin quen ingrat,
M'o deus gret din coll va ine,
D am beza lezet em liberte.

E c'han da veza interet
En ifern gant an dud daonet ;
Da lesqui ebars ar flammou,
Da james gant an diaoulou.

Ha possubl ve, o va Doue,
E serfoc h ouzomp dor an ev :
Obtenet d'emp, o va Zalver ?
Eur plaç en ho cloar eternel.

(Propriété.)

